

## *YF\_0077\_Konskried Logivi*

Selaouit holl ha klevit  
Ur son a nevez komposet  
war sujet un den yaouank  
Hag en-eus bet glac'har  
O kuitaat e vestrez  
E dad e vamm e c'hoar

Me am-eus karet fidelamant  
Ur plac'h fur ha yaouank  
Ha koant dreist an holl verc'hed  
Hep offanso unan anezhi  
Kement lec'h e vije  
Ne garen nemeti

Me am-eus choazet evit mestrez koant  
Ur plac'h fur ha yaouank  
Na ganed na moienn  
Netra ne vanke dezhi  
Na pebezh plijadur  
Donet d'he c'honjoliñ

Met erruet eo ar mandat  
E-touesk ar baotred vat  
Da denno ar bilhed  
En faver ar Roue  
Doue da gonjolo  
Neb a degouezho dehe

En ar ger e oem dastumet  
A oe tri c'chant deus ar baotred  
Ennañ oe un hirvoud  
Anken ha melkonni  
Klask gout piv oe soudard  
Evit parrez Logivi.

Me a yae en ur gampr evit tennañ  
Me a sante ma c'halon krenañ  
O toned ur zonj din  
Em c'halon, e ma spered  
Da lared penaoz oen soudard  
Ha mat am-boe sonjal

P'oe digouezhet ar bilhed ganin  
Ne raen nemet deploriñ  
« - O na Gwerc'hez Vari  
Digouezhet eo ar bilhed ganin  
Ha setu me soudard bremañ  
Evit parrez Logivi »

Roet e oe deomp un tamm koñje  
Evit monet c'hoazh d'ar ger  
Na da laret kenavo  
D'on kerent d'on mignonned  
Na da gimiadiñ  
Deus on oll vestrezed

« - Alleluia ma dous Mari  
Digouezhet eo ar bilhed ganin  
Erru oe an amzer  
A vo ret din ho kuitaad  
O nag ho tilezel

Ecoutez tous et vous entendrez  
Une chanson nouvelle composée  
A propos d'un jeune homme  
Qui a eu du chagrin  
De quitter sa fiancée  
Son père sa mère et sa soeur

J'ai aimé fidèlement  
Une fille sage et jeune  
Et jolie par-dessus toutes  
Sans en offenser aucune  
Partout où elle était  
Je n'aimais qu'elle

Moi j'ai choisi pour maîtresse  
Une fille sage et jeune  
Ni beauté ni biens  
Rien ne lui manquait  
Quel plaisir  
De venir la consoler

Mais l'ordre est arrivé  
Parmi les bons gars  
De tirer au sort  
Pour le service du roi  
Que Dieu console  
Ceux sur qui il tombera

Dans la ville où nous étions rassemblés  
Il y avait trois cents gars.  
Là il y avait soupirs  
Angoisse et tristesse  
Pour savoir qui serait soldat  
Pour la paroisse de Loguivy

Quand j'entrai dans la chambre pour tirer  
Je sentais mon coeur trembler  
Il me vint à l'idée  
Dans mon coeur et dans mon esprit  
Que je serais soldat  
Et je pensais juste

Quand j'avais tiré le billet  
Je ne faisais que me désoler  
« - O ! Vierge Marie  
J'ai tiré le billet  
et me voilà soldat maintenant  
Pour la paroisse de Loguivy »

On nous donna un petit congé  
Pour aller à la maison  
Pour faire nos adieux  
A nos parents, à nos amis  
Et prendre congé  
De nos maîtresses

« - Alleluia ma douce Marie  
J'ai tiré le billet  
Et le moment est arrivé  
Où il me faudra vous quitter  
Et vous délaisser

Martexe evit mat »

« - Ne gredan ket ma servicher  
M'on-eus kollet on amzer  
Nag on eurusted  
Vo troet e-barzh ar glac'har  
Me garehe bout laket  
E-kreiz kalon an douar

« - Alleluia ma dous Mari  
Ma 'z on bet un ennui  
C'hwi ho-po ho liberte  
En parrez Logivy  
Ha me a vo dalc'het amañ  
Dindan an dourmandi »

« - Alleluia ma servicher  
Hir e kavin an amzer  
O toned d'ho kortoz  
C'hwi a deuio d'am ankouaat  
Ha marteze goude-se  
C'hwi raio ac'hanon goap »

« - Kement ker a dremenin  
Me am-bo sonj deus a Vari  
Mari vo war ma c'halon  
Mari, Mari, ma spered  
Mari honnezh a garan  
Dreist an oll verc'hed »

« - Mari en ho oll pedennou  
C'hwi ho-po sonj ac'hanon  
O na ma retornan  
C'hoazh da ma bro birviken  
Me 'n em dalc'ho en ho keñver  
Evel ur gwir gristen

Peut-être pour toujours

« - Je ne crois pas mon serviteur  
Que nous ayons perdu notre temps  
Que tout notre bonheur  
Se change en amertume  
Je voudrais être enterrée  
Dans le coeur de la terre.»

« - Alleluia ma douce Marie  
Si je vous ai été un ennui  
Vous aurez votre liberté  
Dans la paroisse de Logivy  
Et moi je serais tenu ici  
Par le tourment »

« - Alleluia mon serviteur  
Je trouverai le temps long  
A vous attendre  
Vous en viendrez à m'oublier  
Et peut-être ensuite  
Vous vous moquerez de moi »

« - Dans toutes les villes où je passerai  
Je penserai à Marie  
Marie sera dans mon coeur  
Marie, Marie, mon esprit  
Marie celle que j'aime  
Par-dessus toutes les filles »

« - Marie dans toutes vos prières  
Souvenez vous de moi  
O si je reviens  
Dans mon pays de toujours  
Je me comporterai  
Envers vous comme un vrai chrétien.»